


6

Diouzhtu e kreskas he c'horf, he blev,  
hag he zammig lost a hiraas, he daoulagad du a zeuas  
da vouloù gwer a lugerne en noz. Ha pa zigore he genoù  
e veze ken eürus o klevout he mouezh ma rouzmouze.

« Trugarez vras, Itron vat,  
bremañ ne'm eus mui aon ebet.  
N'eus loen eürusoc'h egedon er bed. »








Met kerkent ha ma tistagas ar c'homzoù-mañ  
e klevas harzhadennoù ur c'hi-red, naoniek ha kriz,  
a oa o tremen buan rak klevet en doa kig-kazh en e gichen.  
« Miaou! » a grias hon c'hazh o pignat war veg ur gistinenn.  
« Itron, deuit en-dro. Bremañ e welan n'eo ket diarvar  
buhez ur c'hazh. Me a garfe a-walc'h bezañ ur c'hi! »








Fri damruz hon c'hazh a zeuas da hir-hir,  
e zivskouarn begek hag e bavioù nerzhekoc'h.  
E-lec'h ar viaouadenn a blijje kement dezhañ bremaik,  
e c'halle harzhal laouen.  
« Mil bennozh, ltron vat, ne'm eus mui aon ebet! »







Met evel ma ouzoc'h,  
ne vez ket aes buhez ar chas-red.  
Evezhiek e vez ar c'hizhier ha re vuan  
e red ar gedon. Ha ne zebrer ket bemdez.  
Truez en doa ur c'houer ouzh hon c'hi.  
En c'has a reas d'ar gêr.  
« Deus! Mirout a ri va zi ha bemnoz ez po soubenn vat. »  
E heuliañ a reas ar c'hi. Ur chadenn houarn a lakaas an den  
en-dro d'e c'houzoug hag en stagas ouzh dor ar gludeg.  
Bemnoz e tegase dezhañ ur soubenn domm ha druz.



